

13

Ha ni c'helte fallgalouni.
Pa velimp kroaz ar Gilligi ;
Savet huel var ar garrek,
D'hor savetei e z'eo barrek.

14

Guerc'hez Vari, hed hor buez
Bezit hor mam, hor patrounez,
Diouz ar pec'hed hag ann tarz-mor
Dioallit paotred ann Arvor.



Imprimatur :

Corisopiti, die 5 Julii 1895.

A. GADON, *vic. gén.*



KANTIK MARTOLODED PORTSALL

DISKAN


Itroun Vari ar Skapular.
Euz Portzaliz, O Mam dispar
Gant ho mantel ni'r bo goasked } *bis*
Var vor, var zouar diouallet.

1

Evel mignoured hor Zalver
Sant Yan, sant Andre ha San Per,
Enn eur vagig o pesketa
Ni a renk gounit hor bara.

2

Tenn ha poapiuz eo hor micher ;
Bep pred e vezomp enn danjer ;
Hor bagig paour 'vez goal gaset,
Ha burzud eo na vez kollet.



3

Etrezomp ni hag ar maro
Ne deuz nemet planken tano ;
Stereden vor, 'dreuz ar reier
Mesañt bag ar pesketaer.

4

Pedit ho Map hag hor Zalver
Da rei chanz-vad d'ar moraer,
Pesked, bezin leiz he vagik,
Bara d'ar vam, d'ar bugelik.

5

Enn env c'hui a zo gallouduz
Ho trôn 'zo harp da drôn Jezuz,
Ho pedennou ep mar ebet
Gant'han a vezo selaouet.

6

Pa 'zeo plijet ganeoc'h, Mari,
Enn hon touez kaout ho ti,
Ni a reno buez dinam
'Vit ma trido kaloun hor Mam.

7

Evit ato ni a ra le
Da blega da lezenn Doue ;
Ra zeui hon teod da zizec'ha,
Ma nê zalc'homp d'hor promesa.

8

D'ann offerenn ni a ielo,
Ha diouz tavarn ni ziouallo,
Biken avel ar skueriou fall
Ne c'huezo var zouar Portsall.

9

Ne fell ket deomp, o Mam garet,
Du-ze e palez an Dreindet,
E vec'h gueleit o skuill daelou
Abalamour d'hon dizurziou.

10

Enn hoc'h iliz koant ha skêduz
Ni a garo laouen, joaiuz,
Pedi Mam n'he deuz ket he far,
Introun Vari ar Skapular.

11

A vre-ma betek hor maro,
O Mam zantel, ni ho karo ;
Hoc'h ilizik 'zo var ann aod,
C'hui ziouallo ar martolod.

12

Pa vezo tenval ar goabren,
Pa ziroлло an tarziou guen,
Var-zu ar Groaz hag an iliz
Gant fizianz ni rai eur zell piz.